

Dornskridoù Milin : Kanaouennouù

69. BREIZ-IZEL

ton : ann hini goz

Me a lavar heb aoun ebed
eo Breiz gwella bro zo er bed

Diskan

E Breiz-Izel ounn ganet
Breiz zo va bro garet

Breiz zo hirio evel m'oa kent
douar burzuduz ha bro ar zent

E Breiz e kouez euz ann envou
feiz a zigoll kalz a boaniou

Breiz zo dindan ar baradoz
e leac'h m'ema hon tadou-koz

Relegou sent, tud a vrezel
a zo e besiou Breiz-Izel

E Breiz ann dud gant koz dillad
a wisk ho foan a galon vad

E Breiz nep zo beac'h war he skoaz
pa skuiz ehn hent a harp ar groaz

Ar groaz e Breiz a zav he fenn
beteg ann env euz pep traonien

E Breiz ez euz mengleusiou aour
e kalonnou ann dudou paour

Eurn ti zoul, eur park, eunn iliz
zo er bed-man madou Breiziz.

E Breiz ar paour n'eo reuzeudik :
aour eo treuzou ar pinvidik

E Breiz an aotrou n'en deuz mez
e vont oc'h taol he diek kez.

E peb amzer hag e pep stad
euz bet e Breiz leun a dud vad.

Mar deo kalet pennou tud Breiz
ez euz kalonnou enn ho c'hreiz.

Ann evn ne gar kement he neiz
ha ma kar ar Breizad he Vreiz

E Breiz an heol dre ar wabrenn
zo lagad Doue a c'hoarz laouen.

Sonn ar c'hleier, kroz ar mor doun
E Breiz zo dudiuz d'ar galoun.

Evel bokedou war al lann
e sav e Breiz dudi war boan.

Ne c'houlen ken an holl dud keiz
Nemet beva, mervel e Breiz.

E Breiz ema ar brezounek
iez ann dud vad ha kalounek
+
Ar Brezounek a zo e Breiz
o terc'hel, oc'h harpa ar feiz.

Ar brezounek paz ai da fall
ne vo ger gallek e Bro-C'hall.

Heb ober fae war ar gallek
gwell ec gan-en ar brezounek.

Breiz zo krog stard enn he baniel
ne dro Morse gant neb avel.

Ar c'hisioù koz e Breiz a bad:
ar map zo hevel oc'h he dad.

Breiz zo bet gant Doue dibabet
evit skora penn braz ar bed.

Ha pa var'en war ar c'holo
enn eur verval Breiz me veulo.

E Breiz--Izel ounn ganet
Breiz zo va bro garet.

+ ar brezounek iac'h ha nerzuz,
iez Doue eveldhan gallouduz.

Ar menesiou evel denved
lamm gant dudi oc'h he glevet
ar vein a fraill, ar mor a darz
ann env zigor pa gan ar barz.

° poz reizhet pell-
oc'hik : Ar mene-
siou oc'h he glevet
a lamm gant joa e-
vel denved.

vvvvvvvvv

(Breiz-Izel a zo bet embannet gant G. Milin e Bulletin de la Société Académique de Brest, levrenn 4, 1864-1865, paj. 124-127.)